

# MA DASTUMADEG STOUVOU

Deus da welet,  
Deus da welet,  
Deus da welet  
Ma dastumadeg

Ma dastumadeg stouvoù  
Bout zo a bep seurt ane(zhe)  
Reoù bras, reoù bihan  
Reoù tev ha reoù moan

Ma dastumadeg stouvoù  
Bout zo reoù a bep liv  
Reoù glas ha reoù ruz  
Reoù gwer ha reoù melen

Ma dastumadeg stouvoù  
C'hoant 'm eus ober eskemmoù  
Unan mouk 'vit unan gell  
Eus dastumadeg Mael

Ma dastumadeg stouvoù  
Renket en ur voest madigoù  
Krog a ra de ve(z)añ kalz  
Benn arc'hoazh 'vo muioc'h c'hoazh